

Poeta Magica, Tri Martolod

Tri martolod yaouank (tra la la, la la la la)
Tri martolod yaouank o voned da veaji
Tri martolod yaouank (tra la la, la la la la)
Tri martolod yaouank o voned da veaji
O voned da veaji ge, o voned da veaji (2*)

Gant avel bet kaset (tra la la, la la la la)
Gant avel bet kaset betek an Douar Nevez
Betek an Douar Nevez ge, betek an Douar Nevez

E-kichen Meilh ar Vern (tra la la, la la la la)
E-kichen Meilh ar Vern o deus mouilhet o eorio
O deus mouilhet o eorio ge, o deus mouilhet o eorio

Hag e-barzh ar Veilh-se (tra la la, la la la la)
Hag e-barzh ar Veilh-se e oa ur servijourez
E oa ur servijourez ge, e oa ur servijourez

Hag e c'houlenn ganin (tra la la, la la la la)
Hag e c'houlenn ganin pelec'h 'n eus graet konesas
Pelec'h 'n eus graet konesas ge, pelec'h 'n eus graet konesas

E Naoned, er marc'had (tra la la, la la la la)
E Naoned, er marc'had hor boa choazet ur walenn
Hor boa choazet ur walenn ge, hor boa choazet ur walenn

Gwalenn ar promesa (tra la la, la la la la)
Gwalenn ar promesa, ha par omp da zimezi
Ha par omp da zimezi ge, ha par omp da zimezi

- Ni 'zimezo hon-daou (tra la la, la la la la)
Ni 'zimezo hon-daou, ha pa n'eus ket avataj
Ha pa n'eus ket avataj ge, ha pa n'eus ket avataj

- Ma mamm c'hwi zo 'n hoc'h aez (tra la la, la la la la)
Ma mamm c'hwi zo 'n hoc'h aez, n'ouzoc'h ket piv zo diaes
N'ouzoc'h ket piv zo diaes ge, n'ouzoc'h ket piv zo diaes

- N'hon eus na ti na plouz, (tra la la, la la la la)
N'hon eus na ti na plouz, na gwele da gousket en noz
Na gwele da gousket en noz ge, na gwele da gousket en noz

N'hon eus na skuell na loa, (tra la la, la la la la)
N'hon eus na skuell na loa, na danvez d'ober bara
Na danvez d'ober bara ge, na danvez d'ober bara

- Ni 'ray 'vel ar glujar (tra la la, la la la la)
Ni 'ray 'vel ar glujar, ni 'gousko war an douar
Ni 'gousko war an douar ge, ni 'gousko war an douar